

SKOL

Niv. 5

C'Hwevrer 1957

RIMADELLOÙ

hag unangomzoù



DASTUMADENN A GELENNOURIEZH

RIMADELLOU

hag

UNANGOMZOU .

Raklavar.

An degemer mat graet da " 300 DIVINADELL " o deus va lakaet d'embann diouzhtu an dastumad rimadelloù -mañ a oa bet savet ganin war-un-dro diwar an hevelep mammenoù.

Unan bennak am eus gwellaet, klokaet. Peurvuiañ n'em eus graet nemet o gwiskañ gant an doare-skrivañ peurunvan. Kement-se avat a oa a-walc'h evit distresañ un nebeudig kempouez an taolioù-mouez en gwerzhenoù ' zo. Met sur-mat pep mestr-skol a adkavo buan ar mentadur, a zo un dra ret evit ar rimadelloù da c'hoari war an divhar. Ar mentadur ivez eo a blijo kalz d'ar vugale hag o sikouro da zeskiñ buan ar rimadelloù.

Setu perak e tleer reiñ dezho ul lec'h bras er gelennadurezh, evel ma vez graet er skolioù kembraek ha saoznek, da vihanañ. Tud vras ' zo a soñjo moarvat ez eo krog rener SKOL da randonal -hag e vefe gwelloc'h dezhañ plediñ gant traoù siriusoc'h - met ar re a anavez mat ar vugale a varno disheñvel.

Arabat a vat klask deskiñ re a rimadelloù war-un-dro. Dibab a c'heller e derou pep trimiziad-skol ur c'hwec'h pe un eizh bennak, unan bep pemzek deiz, ha distreiñ alies warno. Abred a-walc'h, kement-se a vo evel just diouzh o anaoudegezh eus ar yezh, e vo barrek ar skolidi da zisplegañ ar "rimadelloù hir" hag a zo anezho holl ivez traoù folklorek.

Va soñj a oa sevel un dastumad unangomzoù evit ar skolioù hag ar strolladoù-yaouankiz. Nebeut a zanvez am eus d'ar mare din-dan an dorn ha kavet e vo war-lerc'h ar rimadelloù.

Unan anezho a oa bet desket din gant va mamm, ya, gant va mamm, Doue d'he fardono! , pa oan 9 pe 10 vloaz evit eured un eontr. War-dro 1930 e oa. "Ar prosez etre ki ha kazh", en doa lakaet an holl gouvidi da c'hoarziñ diroll. Me a rae ar c'hazh, hag ur c'henderv din ar c'hi. Kalz diwezhatoc'h, war-dro 1946, em boa dizoloetan unangomz-se e kambr an Ao. Klerg, pa p oa kure e Ploubêr. Ur blijadur- vras a oa bet evidon an dizoloadenn-se. Meur a hini moarvat eus va lennerien a adkavo amañ rimadelloù bet desket ganto en o yaouankiz hag hanter ankounac'haet bremañ. Plijadur o devo sur-mat ouzh o deskiñ a nevez hag ouzh o deskiñ d'o bugale pe d'o skolidi.

A. Ar C'halvez.

oooooooooooooooooooooooooooo

ALI A-BOUEZ.

Diaes eo dimp embann SKOL a-vareadoù resis. Ar c'houmanant a dalveze evit div niverenn hag a dalvezo c'hoazh evit div niverenn. Klask a raimp liesskrivañ d'an nebeutañ div niverenn ar bloaz. Karout a rafemp zoken embann teir ha peder niverenn ar bloaz. Kement-se a vo diouzh hol labour, hor yec'hed, hag ivez ar c'henlabour a vo kinniget dimp.

Ur baperenn lakaet en ho niverenn a zegaso da soñj deoc'h pegoulz e vo echu ho koumanant.

SKOAZELLAN "SKOL" A ZO SKOAZELLAN AR SKOL VREZHONEK E BREIZH !

TREMEN HEP SKOAZELLAN " SKOL " A ZO LABOURAT ENEP AR SKOL VREZHONEK !

C'HOARIOU.

Evit dispartiañ.

Pa vez ar vugale oc'h ober ur c'hoari ha pa vez c'hoant da c'houzout piv a vezo "e-barzh" da gentañ e kemerer ur boned ha pep hini a laka ur biz war e vord. Unan bennak a zibun neuze ar rimadell-mañ:

1 Ul loa, div loa,
Karabin, karaba,
Impin, bourdon,
Kadkarin, grifon,
Er-maez, kompagnon.

Ar rimadeller, bep ger, a dap war ur biz ha neuze an nini ma lavar dezhañ: "Er-maez, kompagnon", a ya er-maez. An hini na vezo ket bet pedet da vont er-maez a vezo e-barzh.

2 Kemper, Baden, didanderr,
Kouli, Kalon, kantiferr!
Sezailh, Batailh, pimp pouf louf !

An hini a gouezh "louf" gentañ
a zo er-maez.

3 Emañ va mammig boned ruz,
Oc'h ober krampouezh gant ludu,
Ha va zad e penn an daol
O kontañ arc'hant d'e filhor,
Hag an hini bihan e lost an ti
O tañsal gant lost ar c'hi .

4 Brenniliz!
An tour e-kreiz an iliz;
An iliz e-kreiz ar vered;
Mar ne gredez ket,
Kae da welout!

5 Al laer er c'haol,
Piv eo ?
- Yann Boudig eo.
- Pelec'h emañ ?
- Kuzhet eo.

6 Bicha, bula, bicha bala,
Piv a yelo da ingalañ
Marc'h ar Brunig a Lesunig
En deus torret va c'hozh pillig ?
Pillig vihan, pillig vras,
Pillig an holl vourc'hizien ' zo bras.
Ya du ! ya gell !
Pe me ' dorro da eskell,
Eskell gell an durzhunell,
Kerzh d'ar foenneg da youc'hal !

(eil stumm)

7 Bicha, bula, kik ala,
Piv a yelo da gerc'hat
Ki ar Brunig ha Salaunig
A zo fritet war ar billig ?

Pillig vihan, pillig vras,
 Pillig ar bourc'hiz a zo bras.
 Ya du ! ya gell !
 Pe me ' dorro da eskell,
 Eskell brizh-du ar sparfell,
 Kerzh d'ar foenneg mar deo ret.
 Chichant mignon, lagad dilagad,
 Kerzh d'ar gêr pe e vezi taget!

8
 Ar bleiz kozh
 'Pad an noz
 A jilgamm
 E droad kamm.
 Al loar gann
 'Barzh ar stank
 A c'hoari
 Patati !

9 c'hoari ar c'hreunenn aval.

Lakaat ur c'hreunenn aval war balv an dorn ha c'hwezhañ warni
 da c'houzout pelec'h e tleer mervel, ha netra ken !

Greunennig aval,
 Greunennig aval,
 Lavar din,
 En peseurt bro e varvin,
 Pe en breton pe en gall,
 Pe en greunennig aval !

(ar rimadell-mañ an eus klevet en Ploueg-Ar-Mor a zo tost-tre
 da vevenn ar Brezhoneg hag ar Galleg. "En gall" a dalvez ar
 vro c'hallek .)

oooooooooooooooooooooooooooo

Reizhadennoù d'ober e "3 0 0 D I V I N A D E L L".

Niv.6.Lenn:"Hag ur gouzoug hep penn." Niv.54:"ar c'helorn". Niv.145:"Pe-
 seurt kemm "Niv.161:" da gement den a zeu en ti. 167:"Ne deo na gouremet".
 Niv.190:"Tan ruz bemdeiz ouzh va zeir gar". Niv.192:"n'hellit ket diouerifñ"
 Niv.197:"Melen evel our..." Niv.205:"Pegoulz e ra an dent.."Niv.234."Duig
 a daol da ruzig." Niv.238:"Bet matezh e ti an Aotrou."Niv.265:"E tremenan."
 Niv.270 : "Blev ha laou un den."

90/6/8/8/3/6/6/8/9/2,3/8/2/8/2,8/9/

PRENIT AN NIVERENNOU KOZH HAG A CHOM ATAV NEVEZ :

SKOL I :Penaos kelenn ar Brezhoneg evel eil yezh.
 Ar C'hembraeg e skolioù Kembre.

SKOL II Kelennadur ar Frizeg.

SKOL III Douaroniezh Vreizh,gant A.Guilcher,eus Skol-Veur Nancy.

SKOL IV 3 0 0 DIVINADELL ,evit ar skolioù hag an tiegezhioù.

An niverenn da-zont a vo diwar-benn KUDENNOU AR SKOLIOU ER SLESVIG.

SKOAZELLAN " S K O L " A ZO SKOAZELLAN AR SKOL VREZHONEK E BREIZH.

TREMEN HEP SKOAZELLAN " S K O L " A ZO LABOURAT BNEP AR SKOL VREZHONEK !

c'hoari ar c'hadig pe ar bizied.

Evit diduiñ ur bugel bihan e vez graet dezhañ digeriñ e zorn hag e vez hilliget ar palv en ul lavarout:"

IO Amañ eo bet ar c'had o peuriñ.

Goude ez eer eus an eil biz d'egile hag o pegañ enno diouzh tro, en ur genderc'hel gant ar regenn:

Hemañ en deus he gwelet,
Hemañ en deus he redet,
Hemañ en deus he faketa,
Hemañ he deus he debret,
Ha hemañ bihan, ha n'en devoa bet tamm,
A zo aet d'ar gêr da lavarout d'e vamm,
Hag a zo bet foetet gant ur bod-lann!

Neuze e reer an neuz da skeiñ war biz bihan ar c'hrouadur.

(eil-stummoù)

Aze em eus ur pradig
E-lec'h ma peuras ar c'hadig;
Hemañ he gwelas,
Hemañ he redas,
Hemañ he zapas,
Hemañ he debras,
Hag an hini bihan kamm,
N'en deus bet tamm, tamm, tamm! (da lavarout en ur j hejañ ar biz)

Hemañ eo ar prad,
A oa peuret gant ar c'had.
Hemañ ' redas,
Hemañ ' dapas,
Hemañ ' gignas,
Hemañ ' debras,
Hag ar bizig bihan kamm
N'en devoa bet tamm
A oa aet d'ar gêr da lavarout d'e vamm.

Pradig, pradig
E-lec'h ma redas ar c'hadig.
Hemañ ' welas,
Hemañ ' redas,
Hemañ ' dapas,
Hemañ ' debras,
Hemañ an hini bihan kamm
A zo aet d'ar red da lavarout d'e vamm:
"Kuik, kuik, kuik!
N'em eus bet tamm
Eus ar c'hig!".

Evit touiñ.

Setu amañ le ur bugel pe e zoare da douiñ. Kregiñ a ra gant e viz bihan e biz bihan e geneil , pe e hini e dad pe e vamm hag e tistag ar gerioù mañ:

II Bizig bihan, bizig moan,
An hini 'lavar gevier ' ya d'an tan,
Bizig bihan, bizig spern,
An hini 'lavar gevier ' ya d'an ifern.

Pa ra daou vugel un trok bennak, evit sinañ ar marc'had etrezo, e tapont krog an eil e biz egile en ul lavarout:

Bizig bihan, bizig spern,
'N hini' droko 'c'h ay d'an ifern .

C'hoari buoc'hig-Doue.

Ar vuoc'hig-Doue a vez lakaet war balv an dorn gant ur bannac'h halo. Tamm ha tamm e teu marbluñv he divaskell-diavaez da zislivañ. Ar vugale, hag a gav dezho e vez an amprevan o skuilh e wad, a gan e-keit-se ar gwerzhennou-mañ:

I2 Buoc'hig-Doue, taolit ho kwad,
Pe me ho taolo dreist ar c'hoad,
Da glask ho mamm hag ho tad.
Emaint du-hont, e kostez ar bod,
O daouarn ganto en o god,
Prest da vervel gant an anoued;
Emaint du-hont, e kostez al lenn,
Ha ganto pep a walenn wenn.

C'hoari bizibul.

Daou vugel a gemer pep a etev, a dro gantañ davet an deiz an eil e-keñver egile hag a c'hwezh warnañ en ul lavarout:

I3 Bu al lae ! Bu al lae !
Krog an tan e koad ar c'hae,
Hag en ti hag er wern,
Hag e koadig Milin ar Wern,
Hag en ti hag en oaled,
Hag en kraouig an deñved.

C'hoari an dorn goullo.

Ur paotr a guzh e zaouarn a-dreñv e gein; en unan ez eus un dra bennak, hag en egile peurvuiañ netra. Goulenn a ra digant e gamalad:

I4 Gutu, Gutu, Mari Wilhou,
E peseurt dorn emañ da spilhoù ?
Pe en dorn kleiz, pe en dorn dehou ?
Pehini anezho ho po ?

En ur groaziañ divhar ur bugel.

I5 Daou droad bihan o vont d'ar c'hoad
Ur votez nevez war pep troad;
Daou droad bihan o vont d'ar gêr
Goude bezañ kollet ur votez gaer.

E-barzh an ti.

I6 Skoit war an nor; (skeiñ war an tal)
Sellit e-barzh an ti; (sevel an abrantou)
Savit ar c'hlañched; (sevel ar fri)
Deuit e-barzh; (lakaat ar biz er genou)
Sonit ar c'hloc'h. (Sachañ war ar skouarn)

Evit c'hoari war an daoulin.

I7 Hei ! eta marc'hig, Hei ! do ! marc'hig,
Pelec'h emañ da barkig ? Pell emañ da barkig ?
Pe emañ pell, pe emañ tost, -P'emañ pell, p'emañ tost,
Deus d'ar gêr a-raok an noz. Me' vo er gêr a-raok an noz.

- 18 Marc'h Hamon a ya da Vrest,
Dishouarn ha digabestr,
Dre an drein, dre ar vein,
Hag Hamonig war e gein.
- 19 Hei do ! Marc'h Hamon,
Da landerne davit bonboñ.
Bonboñ, bara mat,
D'ar paotrig-mañ ha d'e dad
Hag un tammig war ar samm
D'ar paotrig-mañ ha d'e vamm.
- 20 Ho! ho! marc'hig bihan gwenn,
'Gas Pierig d'an oferenn!
Ho! ho! marc'hig bihan griz
' Gas Pierig d'an iliz !
Ho ! ho ! marc'hig bihan glas
'Gas Pierig d'ar wazh vras.
- 21 Dip ha dip, ha doup ha doup,
Emañ va c'hazh o nezañ . . . stoup,
Ha va c'hi o tibuniñ,
Met va gwiader a vank din.
Gwiader, ig traoñ ar wazh,
Deuit davedon warc'hoazh
D'ober dilhad d'am c'hazh
Ha va c'hi a chomo en nozh.
- 22 Pater noster debidore,
Marv eo kiez ar Balore;
Kement kiez a zo er parlamant,
A zo bet en interamant,
Nemet kiez Yann ar Go,
Honnezh n'eo ket bet war-dro,
Ha kiez ar Miliner
He deus torret he gouzoug
O lampat dreist ar skalier.
- 23 Ur c'hadig, div c'hadig, teir c'hadig rouz
A oa en noz-mañ er bern plouz.
War c'hoazh da noz e vezint adarre,
Mar gellan ,me a dapo anezho.
Ur c'hadig, div c'hadig, teir c'hadig wenn,
A oa en noz-mañ er bern foenn,
Warc'hoazh da noz e vezint adarre,
Mar gellan me a dapo anezhe.
Ur c'hadig, div c'hadig, teir c'hadig c'hriz,
A oa en noz-mañ er bern pizh.....
Ur c'hadig, div c'hadig, teir c'hadig du,
A oa en noz-mañ er bern ed-du.....
Ur c'hadig, div c'hadig, teir c'hadig, melen
A oa en noz-mañ er bern brenn...

24. Hei ! Hei ! Trikotin, (Trikotin:anv ar gazeg)
 Da Lanuon da gerc'hat gwin,
 Da gerc'hat gwin ha bara gwenn,
 Dreist an drez ha dreist ar vein,
 Hag Ifig bihan war he c'hein! (Ifig:anv ar bugel)

Un den en e goazez a gemer ar bugel bihan war e varlenn hag a laka anezhañ da lammat en ur skeiñ seuliou e votoù war an douar, hep distokañ begoù e dreid. En ul lavarout: " Dreist an drez ha dreist ar vein" e lammer kalz kreñvoc'h , pezh a laka bep gwech ar bugel da c'hoarzhiñ.

Rimadelloù a vez implijet gant ar merc'hed.

25 Marc'haridig a blij din,
 Kalz a labour a ra din,
 Goro ar saout, o c'has er-maez,
 Terriñ ar bodez, skuilhañ al laezh !
 Mont d'ar c'helorn davit kig
 Hag hen debriñ evel ur big,
 Mont d'al liorzhañ davit kaol
 Hag o drailhañ war an daol.

(eilstumm)

Mari-Janig a blij din,
 Kalz a labour a ra din:
 Goro 'r saout, o c'has er-maez,
 Terriñ ar bodez, skulh ar al laezh,
 Mont d'ar c'hav da evañ gwin.
 'N Aotrou Kavalier,
 Torret e c'har dreist ar skalier,
 'N Aotrou Kerneur (anv all ar c'hazh)
 Sachet anezhañ d'e heul.

26 Marc'haridig Mili-maout,
 Deuit en hent-mañ gant ho saout;
 Un askornig a zo er pod,
 Deuit en hent-mañ, ho po lod;
 Daou avalig ' zo ennañ,
 Deuit en hent-mañ hag ho po unan.

(eilstumm)

Marc'haridig Bili-Maout (kaoc'h maout)
 Deus en hent-mañ gant da saout.
 Tri avalig ' zo en tan,
 Deus en hent-mañ, ' po unan.
 Kig ha fars a zo er pod,
 Deus en hent-mañ, ' po da lod.

27 C'hoari ar skouarn.

En ur gregiñ e skouarn unan all e c'houlenner digantañ:

-Dir pe houarn ?

-Dir!

-Neuze e vo sachet warni hir ! (hag e sachet dezhañ war e skouarn)

-Houarn !

-Neuze e vo sachet dit war da skouarn! (hag e sachet warni adarre).

Ret eo respont:

-Na dir na houarn,

Gant ma vo lezet ganin ma skouarn!

Pater Noster Dibidoup.

Ar rimadell-mañ am eus adkempennet ha klokaet . . . diwar eilstummoù. Rannet eo bet ganin ivez e teir lodenn hag a seblante bezañ distag an eil diouzh eben. Implijet e veze da lakaa t ar vugale da lammat war an daoulin. Sklaer eo e c'hell bezañ desket evel displegadenn farsus, ha meur a wech ez eo bet unan eus an eilstummoù war roll ar Bleuñ-Brug.

28

I

Pater Noster dibidoup,
'Mañ va c'hazh o nezañ stoup;
Ha va marc'h o nezañ gloar
D'ober loeroù d'ar bihan;
Ha va yar o nezañ seiz
Ha va c'hog o kanañ dezhi,
Ha va c'hi war lein an ti
Oc'h aozañ boued d'an houldi;
An houldi dorn ouzh dorn
O kas an toaz. d'an ti-forn;
Hag al louarn war lein an ti
Oc'h ober al lez d'ar gwazi;
Hag vuoc'h war an hent
O krial forzh gant an droug-dent;
Hag ar mab e penn an ti o c'hoari gant lost ar c'hi.

II

29 Va zad kozh e-tal an tan
' C'houlenn petra a vo da goan;
Ha va mammig boned-ruz
Oc'h ober krampouezh gant ludu;
Krampouezh-ludu ha yod ed-du,
Ha bazhadoù war an daou du;
Itron Varia Koadlevenez,
Krampouezh gwinizh ha chufere;
Da viz mae avaloù glas;
An hini ' oar lavaro c'hoazh!

III

30 Ar C'harveg kozh o vont d'e lein
Ur c'hozh tramailhoù war e gein;
Ur votez-koad ouzh e revr
D'ober dezhañ hastañ kaer;
Tantididoujen, tambididei,
Ar C'harveg kozh ' zo paotr anezhi!

aaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaaa

"An hini na gar ket e vammvro, n'hell karout netra". Lord Byron.
"Den ebet na gar e vro dre ma'z eo bras, met dre ma'z eo e hini". Seneca.
"Pobl ebet n'eo bet adsavet dre vallozhiñ war devezhioù pell ha glori-
us hec'h . . . istor." Vasquez de Mella.

MOUEZIOU.

Loened ar Vereuri.

an deñved:

31 Hor, mereuri a Goad-Bleiz
 Bravañ hini ' zo en Dreizh!
 En^oez eus ur bagad
 A ouzhpenn triwec'h dañvad;
 Selaouit-i o vegeliat:
 Bê, bê, bê !

ar c'hi:

32 Eno' mañ Loullig, hor c'hi,
 Daou vignon ac'hanomp-ni !...
 Eñ a ya da gas an deñved
 D'ar park gant an holl loened;
 Eñ ' harzh ouzh an hailhoned:
 Waou, waou, waou!

ar saout:

33 Pa vez amzer gaer en h añv,
 D'ober un dro-bell ez an.
 Piv' zo du-hont, a larit ?
 Selaouit hag e klevot!
 Sed a ganont holl kevret:
 Moû, moû, moû !

ar c'hilhog:

34 Ar c'han a zo din ur marzh
 Pa vez an deiz en e darzh!
 Gant ar beure e sav sklaer,
 Gwechoù hir ha gwechoù berr;
 An holl her c'hlev er c'harter:
 Kô, kô, kô, kô, gôg, gôg, gôg.

ar c'hizhier:

35 -Mar dan dit.
 -Fout kaer a ran ac'hanout.
 -Me a vreso dit kig hag eskern ,
 Evel un diaoul eus an ifern.
 -Fout!fout!fout!

An Evned.

an alc'hweder

36 Pêr, Pêr, digor din,
 Biken, biken ne bec'hin.
 (en ur ziskenn:)
 Grin, grin, grin, grin, grin,
 Diaoul bras e teuan d'an diaz.

Karget e oa bet an alc'hweder da gas ar vuoc'h .O vezañ m'he doa
 baleet ar vuoc'h war e droad, e pignas er vann en ur leñvañ:

37 Ich, ich, ich, torret em eus va gar,
 Ich, ich, ich, ich, ich, ich, ich!

ar bistrag:

38 C'hwi strep, c'hwi strep!

ar vran:

39 (o tont etrezek he neiz:)

-Me am eus kavet un touuuuseg! Me am eus kavet un touuuuseg!

(an tad-bran e beg ar wezenn:)

-Lard eo, lard eo ?

- Soa tout, soa tout ?

Pokit d'e zaoulagad, pokit d'e zaoulagad!

Laorañsig, ma mabig, deuit d'ar banked, deuit d'ar banked !

ar goukoug:

40 Koukoug,
Togoù plouz.

kougoug, kougoug, kougoug, pennoù touz,
Lakait ho togoù plouz.

al laouenan:

41 (o tiskenn war ur ruskenn wenan:)
Pim ! paon ! paon ! fanterr... biac'h!... N'eus den ?
Unik hag unik,
Divik ha divik,
Teirik ha teirik,
Mont a reont holl em c'hofig!

42 (Er goa v e toull ur c'hraou:)
O'hennigoù, Oc'hennigoù!
E ti va zad, 'vat, 'z eus oc'hen o deus kein
Kof, kostez, plankenn gar ha div feskenn
Memez tout tra evel va re !

43 (Pa ziskenn war ur barr:)
Pebez gar a zo emañ war ar barr,
Dir pa ne dor,
Houarn pa ne bleg!

44 Me a garfe kaout ur barr
Ken tev ha va c'hof-gar,
Dir pe houarn.

an tadmoualc'h:

45 Kia du, kia ruz,
Da charre koad d'ar Menez Du.

ar pintig:

46 Mar em bez ur mab, me hen desko da lenn ...ha da skriiivañ!
Pelec'h emañ an hent da vont da Wiskriou, c'hwiou ?

ar glesker.

47 (ar glesker e bord ar wazh:)
-Ez an da greñv, ez an da greñv .
(egile:)
- Wa, wa, wa !

al loened d'ar sul da noz.

48 ar c'hilhog :- erru eo ar mestr er gêr.
ar c'hazh Mignaoñ:- Hag eñ mezo, mezo .
Fañch Toanenn-Borc'hell:- Peoc'h! peoc'h!

an trouziou a bep seurt.

49 ar c'hleier : Bim balañ,
Va mamm a zo klañv.

50 ur foetadenn :ta flik ha flak.

51 ur bugel o kouezhañ : Badadao.

52 ur marc'h :dipa, dapa.

53 ar stlakerezed :dig ha drag.

54 Biskoazh kemend-all
 'Vel ' m eus gwelet en Lokenvel en deiz all.
 Me' m eus gwelet
 Ur c'hi du o plantañ kaol,
 Ul louarn oc'h arat,
 Ur yar o pigellat.

Biskoazh kemend-all
 'Vel e foar Vrasparz en deiz-all:
 Eno ' oa lern o werzhañ yer
 Ha houidi o prenañ per;
 Bez ' e oa ivez un onner zall
 O tougen ar bed-mañ hag ar bed-all
 Ha c'hoazh e lare:"Tec'h!tec'h!tec'h",
 Ne oa ket ganti hanter vec'h.

55 Dek santim a zo daou wenneg,
 Tregont lur a ra dek skoed;
 Gwell eo kerc'h da lardañ kezeg
 Eget n'eo touchann ar foued.

Dek santim a ra daou wenneg;
 Tregont lur a ra dek skoed;
 Gwellañ tra a oufen ober
 Eo sevel pa vin kouezhet.

56 Me'm ' eus un denig bihan drouk
 Hag un tortig war e choug.
 Evitañ da vezañ tort,
 Bez ' en deus madoù a bep seurt,
 Bez' en deus kanab ha lin,
 Hag ed da gas d'ar vilin,
 Bez' en deus lin ha kanab
 Hag ed da gas d'ar marc'had.

57 Dominus vobiscum,
 Kouezhet ar person en dour tomm;
 Ra'z eo bet tennet er-maez
 Kouezhet eo bet'barzh ur volennad laezh,
 Ha c'hoazh ne lenve(- ouele) den.

58 Dominus . . . vobiscum,
 'Lec'h eo staget ar c'havr eo dav dezhi chom.
 Mar he deus boued e tebro,
 Ha mar n'he deus ket e vlejo.

59 Bim baoñ,kloc'hig Plourin,
 Torret eo kleier Sant-Varzhin!
 Aet eo an Ankou
 Da Blouganou
 Pevar flanken en e c'henou.

Bim baoñ,kloc'hig krec'h
 Marv eo Yannig abaoe dec'h;
 Interet 'barzh ar poull-pri,
 Aet e bennig gant ar c'hi
 Hag e droadig gant ar c'hazh
 Dindan ar gwele bras.

- 61 Jañ-Pier Bistrakig,
Paotrig e vamm-gozh,
'N ur dommañ lost e roched
'N doa poazhet bonton e gof.
- 62 Alampatibadibadouch,
Ar yarig a gar he labous,
Alampatibadouchik,
Ar yar a gar he labousig.
- 63 Piv a zeu, me a ya,
Da goad Poullmorgant da lusa;
Me' zo bet da heul en-dro,
Lakaet va zoaz ganin en go,
Roet boued d'am bugale
Ha prest da vont en - dro adarre.
- 64 Evit distagellañ an teod.
Ur Santegonegadez on,
Ha ne zisantegonegadezin ket,
Ken na vo disantegonegadezet
An holl Santegonegadezed all.
- 65 Deizioù ar sizhun.
Dilun, dimeurzh ha dimerc'her,
Ha diriaou ha digwener,
Disadorn o vont da Gemper,
Ha disul o tont d'ar gêr.
- 66 Evit kontañ.
Deomp atav,
Pemp ha pevar a ra nav,
Deomp bepred,
C'hwec'h ha pevar a ra dek;
Nav ' ra ur gont vrav,
Ha dek kont ar wreg.
- 67 Evit luskellat ar vugale.
Toutou, toutou, bihanig,
Toutou, me ' gano deoc'h.
Pa zeuy ho mammig d'ar gêr
E roio chikig deoc'h.
Toutou, toutou, bihanig,
Toutou, me ' gano dezhi.
An holl dud ' zo o klask ma merc'hig,
Ha den n'en deus ezhomm anezhi.
- 68 Deomp d'hon gwele, Foei, foei,
Eme ar wrac'h wele; A lare ar wrac'hed all dezhi.
Hep hon c'hoan,
Eme an hini voan;
N'eus ket a sil,
Eme an hini vil;
Kemer un torch plouz,
Eme an hini lous;

- 69 Kousk aze, buan, va breurig,
Kousk aze ez kavellig;
Ael Doue 'us d'az pennig
Az tiwall gant e askellig.
Kousk aze buan, va c'halon;
Evit prenañ dit un oanig,
Da dad ' zo aet da Lanuon;
Un oanig gwenn hag un eostig;
Kousk aze buan, va c'halon.
-- A .bep seurt.
- 70 O va Doue benniget,
Pebezh torrad laboused!
Naontek vi am boa laket,
Ugent lapous am eus kavet!
- 71 Va c'hi ha va c'hazh a oa dimezet dec'h;
Kalz a dud a feson a oa war al lec'h:
Sourig ha Mourig, Markiz an Treneur,
Ha kalz a liboudennoù a oa deuet da heul.
- 72 Hei da Gemper, hei d'ar Pont! (gwelout an niv. I7 hag ar re
Da Bont-'n-Abad ' ranker mont, a: zeu war-lerc'h)
Da glask amann d'an Itron
Eus diwar ar maez,
Na gav ket mat soubenn al laezh.
- 73 Hei do, marc'h Al Lae, (id.)
Da winkal da Gorlae;
Marc'h Al Lae 'ya da Vrest,
Dishouarn ha digabestr,
Dreist: an drez ha dreist an drein,
Ha Pêrig war e gein.
- 74 Sant Pêr ha Sant Paol
A oa o daou o koaniañ ouzh an daol;
Hag ec'h erruas Sant Nigouden,
Gant e bennad blev melen;
Hag e krogas en ur Sant kaezh
Hag hen taolas dre ar prenestr er-maez!
- 75 Kan ar yar goude dozviñ.
Me ' zo bemdeiz dev, dev (pe: o tozviñ)
Ha n'on ket pelec'h ez a ;
Ar wreg a dorr, an ozhac'h a lip,
Ha mat a-walc'h a ra !

76 Bravañ kilhog a zo er vro-mañ
 En ti Yann an Du emañ.
 E bluegoù a zo ken dous
 Hag ar seizh pe ar voulouz.
 E loeroù a zo melen-c'hlas,
 Hag e vragoù a zo tafetaz.
 Fachet holl dud an ti
 Dre ma teu abred d'o dihuniñ.
 Ha dreist d'an holl Izabellig;
 Honnezh hen karfe marv-mik.
 -O ! tav sioul, emezi, d'ar c'hilhog;
 O ! tav sioul, na vez ket ken sot!
 -Mar deo-me mestr ar c'higi,
 Me a gano d'an eur ma karin.
 Me a gano da hanter-noz,
 Hep mont na hiroc'h na berroc'h.

77 Kouignaoua.

Kouignaoua,
 Sac'h bara,
 Dour bervet,
 Minevet...
 Kouign, kouign,
 Emañ da sac'h en pign!
 Bremañ ni ho trugareka
 Da vezañ roet dimp hor c'houignaoua.
 Kouignaoua, kouign, Pipi,
 N'em eus bet mann diganti,
 Nemet ur grampouezhenn gras
 Hanter zebret gant ar c'hazh.

78 An HIGENANE.

Amañ'z eus un ti bras hag uhel,
 Hag a vez gwelet eus a-bell.
 H ! H !
 C'hoazh e vefe gwelet a-bell bro
 Panevet d'ar c'hoad a zo tro-war-dro.
 'Barzh an ti-mañ 'z eus tri mab,
 Unan Roue hag un all Pab;
 Unan Roue hag un all Pab
 Hag un all hevel ouzh e dad !
 'Barzh an ti-mañ 'z eus un ozhac'h mat,
 Neal! ar wreg hen taiv ervat.
 Me 'wel ar wreg o vont d'ar charnell
 Gant he fladenn hag he c'hontell;
 Troc'hit-eñ pell diouzh ho torn
 Gant aon da droc'hañ an askorn.

Hag askorn troc'het ne dalv ket,
Nag ar gwad rivet kennebeut.

Evit hetañ ur bloavezh mat.

79 Ur bloavezh mat a souhetan deoc'h gant
Gant yec'hed ha prosperite,
Hag ar baradoz e fin ho puhez.

Ur bloavezh mat digant Doue
Evit ar c'horf hag an ene.

Ur bloavezh mat ha buhez hir,
Hag ar baradoz da fin.

Kenavo Meurlarjez.

80 Va bugale, tostait amañ,
Ret eo din kuitaat ar vro-mañ.
Aet eo ar c'horaiz bremañ en un tu,
Me ' gred eo aet da glask ludu
O soñjal start va louzaouiñ.
Met faziañ a ra, me ' bari,
Rak pa zeuy gant e ludu
Me ' dec'ho ac'hann en un tu;
Ha sur-mat, mar teu war va lerc'h,
E ranko-eñ gonit e gerc'h.

En Bro-Saoz pe en Hollandez,
En Alamagn pe en Flandrez,
Me ' gavo tud am c'hemero
En pep anzer ha joa ganto.
Na nec'hit ket, va bugale,
Dont a rin en-dro adarre.

79 bis. Me ' sohet deoc'h ur bloavezh mat,
Yec'hed kreñv ha boued war ar plad.

Kig bevin ha kig sall,
Bara gwinizh ^u ~~...~~ war an toal(- an doubier)

Kaol pomet en ho jardin,
E-barzh al liorzh pour hag irvin,

Karotez bras ha panez krenn
Evit ma vo mat ar soubenn;

Sitr bemdeiz hag a-wechoù gwin,
Hag ar baradoz da fin;

N'eo ket da fin ar bloavezh
Met da fin ho puhez!

80 Son ar c'hazh.

-Bich, ma c'hazh,
Mab da Gampion,
Bontr da Vilion,
Larit din ho son,
Pelec'h ' oc'h bet?

-En Kersaliou.

-Oc'h ober petra ' oa an Aotrou ? -Eus a belec'h ' oac'h kouez-

- O fritañ vioù . - Diwar ar gloued. het?

- Bet hoc'h eus un tamm ? - Bet hoc'h eus droug ?

- Ya, ul lomm. - Kaer eo deoc'h gouzout !

Yann hag e Aotrou.

81 (Yann, merer Kernouenn, a zo war hanter gant e Aotrou. Gant Marc'had Nedeleg ec'h a da welout anezhañ .)

- Deiz mat, aotrou!
- Deiz mat, Yann ! Petra ' zo a nevez en kernouenn ?
- Mann ebet, aotrou, nemet ez eo marv horc c'hi.
- Marv horc c'hi ? Paoukaezh loen ! ha gant petra, Yann ?
- Goude bezañ debret re a gig buoc'h , Aotrou.
- Kig buoc'h ? Ur vuoc'h bennak a zo bet lazhet en Kernouenn ?
- Nann, aotrou. Ho saout eo 'a zo marv.
- Marv, va saout ? Gant petra ' ta , va Doue ?
- Foeltret int bet o charreat dour ?
- Ha perak charreat kement a zour ?
- 'Vit lazhañ an tan, aotrou.
- Komz ' ta ! Na peseurt tan ?
- An tan : a zo kroget en ho lojeiz , aotrou.
- Bet eo an tan war va lojeiz ?
- Ya, aotrou, rostet int tout.
- Evel ma laran deoc'h, aotrou. A-hend-all mann a nevez.

82

An Daou Yann.

- Bonjour, eme Yann.
- Bonjour, eme Yann all.
- Un dra bennak ' zo a nevez, Yann ?
- Ya, Yann.
- Petra ' ta, Yann ?
- Merc'h ar Roue am eus bet, eme Yann.
- An dra-se a zo mat ! Yann.
- Paz ken mat-se, eme Yann.
- Perak'ta , Yann ?
- Hi a oa aet da hadañ segal hag e oa kerc'h a oa diwanet?
- An dra-se a zo fall, eme Yann.
- Paz ken fall se , eme Yann.
- Pera ' ta , Yann ?
- Tri forc'hell kastiz am boa, hag a oa bet lardet gant ar c'herc'h.
- An dra-se a zo mat, eme Yann.
- Paz ken mat se, eme Yann.
- Perak ' ta , Yann ?
- Va gwreg o reiñ boued d'ar moc'h a oa bet kroget an tan en he brozh ha laket ganti an tan en ti.
- An dra -se a zo fall, eme Yann.
- Pera 'ta, Yann ?
- A-raok em boa un ti kozh, ha bremañ em eus unan nevez.
- An dra-se a zo mat , eme Yann.
- Paz ken mat se, eme Yann.
- Perak 'ta, Yann ?
- Pa oa : va gwreg o tarbar war an tour ez eo bet borniet gant ar vazh toull.
- An dra-se a zo fall, eme Yann.
- Paz ken fall se, eme Yann, rak
Pa zegouezh ur gwall
Rz eo gwell bezañ born eget bezañ dall.

Yann hag e Vamm.

83

- Ha dimezet ; oc'h, Yann ?
- Ya, dimezet falla-walc'h; dimezet gant matezh un noter.
- O pegen gwazh, Yann !
- Gwazh ebet , eme Yann, hi he devoa parkigoù,
Ha me am boa hadigoù.
- O pegen gwell, Yann !
- Gwell ebet , eme Yann. Tri farked kerc'h am boa hag a
yeas hol'en dreog.
- O pegen gwazh, Yann !
- Gwazh ebet, eme Yann. Tri forc'hellig am boa hag a oa bet bevet
ganto. - Gwell ebet, eme Yann.
- O pegen gwell, Yann ! O poazhañ ar yod gwedigennoù e tevis va
biz .
- O pegen gwazh, Yann !
- Gwall ebet , eme Yann. Ober a ris ur gest hag e voe savet tri
- O pegen gwell, Yann ! di.
- Gwell ebet , eme Yann. O sevel an hini diwezhañ e voe borniet
va gwreg.
- O pegen gwazh, Yann !
- Gwall ebet , eme Yann,
pan eo bet lavaret gant Doue:
Gwell bezañ born eget bezañ dall.

84

Rimadell hep fin.

M'hoc'h eus c'hoant da glevout ur rimadell
 E lavarin deoc'h un devoa kac'het Yann en e c'hodell;
 E c'hodell ' oa toull,
 Ha kouezhet er poull;
 Ar poull ' oa don,
 Ha kollet al loen.
 Pa oa aet da furchal
 En doa kavet ur c'hefeleg born;
 Ar c'hefeleg born ' oa aet d'anti
 Ha spontet ar c'hi;
 Ar c'hi a oa aet d'an arc'h
 Ha spontet ar marc'h

Ha gouzout a rez Galleg ?

85

- Ha gouzout a rez Galleg ?
- Ya.
- Peseurt Galleg ?
- Galleg Podoù.
- Peseurt podoù ?
- Podoù pri .
- Peseurt pri ?
- Pri melen .
- Peseurt melen ?
- Melen vi .
- Peseurt vi ?
- Vi yar .
- Peseurt Yar ?
- Yar wenn.
- Peseurt gwenn ?
- Sko da vri en daou benn.

86

Da biv out mab ?

- Da biv out mab ?
- Da Yann Galvez.
- Peseurt Kalvez ?
- Kalvez ar Menez.
- Peseurt Menez ?
- Menez ar Fouilhoù.
- Peseurt Fouilhoù.?
- Fouilhoù stoup.
- Peseurt stoup.?
- Stoup goulou.
- Peseurt goulou ?
- Goulou koar.
- Peseurt koar ?
- Koar melen.
- Peseurt melen ?
- Melen vi ?
- Peuseurt vi ?
- Vi yar .
- Peseurt yar ?
- Ur yar wenn.
- Un tog war he fenn.

87

Perak eo du da c'henoù ?

- Lavar din, Rozig,perak eo du da c'henoù ?
- Gant ar mouar eo du .
- E pelec'h emañ ar mouar ?
- Ar mouar a zo war an drez.
- E pelec'h emañ an drez ?
- An drez a zo war ar c'hleuz.
- E pelec'h emañ ar c'hleuz ?
- Ar c'hleuz a zo war ar menez .
- E pelec'h emañ ar menez ?
- Ar menez a zo dindan an erc'h.
- E pelec'h emañ an erc'h ?
- An erc'h a zo teuzet gant an heol .
- E pelec'h emañ an heol ?
- E-barzh ar mor da guzhat;
- Mar ne gredit ket,it da welout !

88

Gousperoù Kernev.

- Lavar din petra eo unan ?
Un Doue hepken,hag a zo en neñv.
- Lavar din petra eo daou ?
An daou destamant,un Doue hepken,hag a zo en neñv.
- Lavar din petra eo tri ?
Tri Ferson an Drinded,an daou destamant.....
- Lavar din petra eo pevar ?
Pevar Avieler,Tri Ferson an Drinded
- Lavar din petra eo pemp ?
Pemp bara en dezerzh,Pevar Avieler.....
- Lavar din petra eo c'hwec'h ?
C'hwec'h gourc'hemenn an Iliz,Pemp bara en dezerzh ...

-Lavar din petra eo seizh ?
Seizh Sakramant ,c'hwec'h gourc'hemenn Doue...

-Lavar din petra eo eizh ?
Eizh Eürusted,Seizh gou Sakramant....

-Lavar din petra eo nav ?
Nav c'heur an Aelez,Eizh Eürusted....

-Lavar din petra eo dek ?
Dek gourc'hemenn Doue,nav c'heur an Aelez...

-Lavar din petra eo unnek ?
Unnek Profed,Dek gourc'hemenn Doue...

-Lavar din petra eo daouzek ?
Daouzek Abostol,Unnek Profed.....

89 Ar C'hilhog hag ar Bolez.

Ur wech e oa ur c'hilhog yaouank hag ur bolez o vont o-daou d' o dervezh.Degouezhet e-kichen u r poull e weljont un aval ruz e-barzh ar wezenn,aon Da gentañ ne fell ket d'ar c'hilhog mont da dapout an aval gant na gouezhfe er poull ha na vastarfe e droadig koant. Ar bolez avat,a zalc'h warnañ kement ha kement ma pign erfin er wezenn.Ar c'hilhog a hejas ar wezenn hag a gouezhas er poull war-lerc'h an aval."Kerzh bremañ,emezañ d'ar bolez,da glask kaol da dorchañ din va zroadig koant mastaret er poull".

I

-Kaol,deus da dorchañ troadig koant ar c'hilhog,a zo kouezhet er poull
-N'an ket,eme kaol.
-Ma ! me ' ya da glask gavr d'az tebriñ .
-Ma ! kerzh ' ta !

II

-Gavr,deus da zebriñ kaol.Kaol ne zeu ket da dorchañ troadig koant ar c'hilhog a zo kouezhet er poull.
- N'an ket,eme gavr.
-Ma ! me ' ya da glask bleiz d'az tebriñ.
-Ma ! kerzh ' ta!

III

-Bleiz deus da zebriñ gavr.Gavr ne zeu ket da zebriñ kaol.
Kaol ne zeu ket da dorchañ troadig koant ar c'hilhog a zo kouezhet er poull.
-N'an ket,eme Bleiz.
-Ma! me ' ya da glask Fuzilh d'az lazhañ.
-Ma! kerzh ' ta!

IV

-Fuzuilh,deus da lazhañ Bleiz.Bleiz ne zeu ket da zebriñ Gavr...
-N'an ket,eme Bleiz.
-Ma! me ' ya da glask Tan d'az poazhañ.
-Ma! kerzh ' ta!

V

-Tan ,deus da boazhañ fuzuilh.Fuzuilh ne zeu ket da lazhañ Bleiz...
-N'an ket,eme Tan.
-Ma! me ' ya da glask Dour d'az lazhañ.
-Ma! kerzh ' ta!

VI.

-Dour ,deus da lazhañ Tan.Tan ne zeu ket da boazhañ Fuzuilh...
-N'an ket,eme Dour.
-Ma! me ' ya da glask Eujen d'az evañ.
-Ma! kerzh ' ta !

VII

- Eujen, deus da evañ Dour. Dour ne zeu ket da lazhañ Tan...
- N'an ket, eme Eujen.
- Ma! me 'ya da glask Louan (ul lerenn) d'az stagañ.
- Ma! kerzh 'ta.

VIII

- Louan, deus da Stagañ Eujen. Eujen ne zeu ket da evañ Dour...
- N'an ket, eme Louan.
- Ma! me 'ya da glask Lard d'az lardañ.
- Ma! kef kerzh 'ta.

IX

- Lard, deus da lardañ Louan. Louan ne zeu ket da stagañ Eujen...
- N'an ket, eme Lard.
- Ma! me 'ya da glask logodenn d'az tebriñ.
- Ma! kerzh 'ta.

X

- Logodenn, deus da zebriñ Lard. Lard ne zeu ket da lardañ Louan.
- N'an ket, eme Logodenn.
- Ma! me 'ya da glask Kazh d'az tebriñ.
- Ma! kerzh 'ta!

XI

- Kazh, deus da zebriñ Logodenn. Logodenn ne zeu ket da zebriñ Lard...
- Ma! eme ar C'hazh, me 'ya.

XII

Ha Kazh da vont da Logodenn,
Logodenn da Lard,
Lard da Louan,
Louan da Eujen,
Eujen da Dour, d'an Dour,
Dour d'an Tan,
Tan da Fuzuilh,
Fuzuilh da Bleiz,
Bleiz da Gavr,
Gavr da Kaol,
Ha Kaol da dorchañ troadig koant ar c'hilhog a oa kouezhet
er poull.

Ar Park Kaer.

90 Me an eus ur park,
Kaerañ da bark!

War ar park 'z eus ur c'hleuz,
Kaerañ da gleuz!
Ar c'hleuz a zo war ar park, hag ar park a zo din.

War ar c'hleuz 'z eus kouezhet ur venn,
Diouzh begig ur goulmig wenn.
Kaerañ da vezenn!
Ar vezenn a zo war ar c'hleuz, ar c'hleuz a zo war ar park, ...

War ar vezenn 'z eus savet un dervenn,
Kaerañ da zervenn!
An dervenn a zo war vezenn; ar vezenn a zo war ar c'hleuz, ...

War an dervenn 'z eus ur brank,
Kaerañ da vrank!
Ar brank a zo war an dervenn; an dervenn a zo war ar vezenn...

War ar brank 'z eus un neiz,
Kaerañ da neiz!
An neiz a zo war ar brank; ar brank a zo war dervenn; ...

War an neiz ' z eus ur vi,
Kaerañ da vi !
Ar vi a zo war an neiz ; an neiz a zo war ar brank ...
War ar vi ' z eus un evnig,
Kaerañ da evnig !
An evnig a zo war ar vi ; ar vi a zo war an neiz ...
War an evnig ' z eus ur bluenn,
Kaerañ da bluenn !
Ar bluenn a zo war an evnig ; an evnig a zo war ar vi ...
hag ar park a zo din .
Hag holl ez int din !

UNANGOMZOU.

Marv ar c'hi Moustach.

1. Pebez domaj !
Ne vo gwelet ken Moustach,
Ar c'hi rouz
Gant e vizaj marmouz.
Evit ar bloaz 'c'h eo marvet,
Kabiten an holl varbeded.
2. Holl chas ar c'hanton
Eo rannet o c'halon
Gant keuz d'o mignon.
Ha kiez ar Person,
Ne bella mui gant an anken
Diouzh penn he barrikenn.
3. A-vihanik e oa bet maget ar c'hi
Gant eskern, kig ha brizhili.
Erwan Gamuz, en berr amzer,
A zeskas d'ar c'hi e vicher.
Ar chas all tout ' oa kanailhez
E-kichen Moustach kaezh ;
Ne oa ket gwelloc'h ki
Evit diwall an ti .
4. Chas ar c'hanton,
O deus graet kañvoù
Da Voustach a zo marv hep aon
Diwar re gofad stripoù.

Un hunvre fentus.

Disul vintin aba savis,
D'ar gousperoù e redis.
Goude merenn , beure mat,
Ec'h is d'an aod da arat.
Va marc'h a sammis war va skoaz,
Hag an alar a reuas war droad.
Houmañ pa ' c'h eas en traez
A zispake mein-benerezh.
Me ' zistroas ac'hane,
Hep firval tamm koulskoude.

Me o welout ur chaseour
O redek gedon 'kreiz an dour,
Ur fuzuilh hir a oa gantañ
keit ga hag ac'hann da Santez Anna.
Me 'redas ken : 1 prim ac'hane
Ma tihunis e-barzh va gwele.

Kanaouenn ar Frioù Lous.

- 1 Bez' ez eus e-mesk an dud kaezh, war hon zammig bern pri
Gizioù mat e pep doare hag ivez meur a si,
Met eus an holl blegioù fall, nen eus ket hini ken lous
Ha hini ar mic'hieg, hini ar frioù lous.
- 2 Bez' ez eus e-mesk an dud kaezh, war hon zammig bern pri,
Kalz a gemm e pep doare, meur ha meur a stumm fri,
Frioù berr ha frioù hir, re gaouenn, re marmouz,
Nen eus ket re ebet re rukunus nemet re ar frioù lous.
- 3 E pep bro, e pep tachenn e kaver a bep seurt,
Frioù togn ha frioù lemm, re eün ha re dort,
A bep fri e c'heller dougen gant enor er barrez,
Ne zisprizer re ebet nemet ar frioù lous.
- 4 Eus an holl dismegañsoù a c'haller lavarout d'un den:
Boued ar Groug ha Yann Al Leue, Genaoueg, Brouder O'hwen,
Troid Treuzet ha Korg Yodig, Luch, Tarluch, ha Tagnouz,
Nen eus hini a gavan ken mezhus ha Fri Lous.
- 5 Sellit ouzh an div c'houlaouenn e-pign ouzh ar fri lous,
Evel dent-genver a-istribilh ouzh an toennoù plouz;
Bep eil taol o sourc'hwilhat, bep eil taol e tiver,
Hag e sav adarre e-giz sachañ foenn er solier.
- 6 N'eo ket gwell start, koulskoude, n'eo ket ul labour reut,
Gwaskañ beg ar fri e-kreiz-tre biz yod ha biz meud,
Gant un tammig plezig d'ar penn, un tammig c'hwezhadenn,
Setu m'eo gwentet ar stal evel ur skopadenn.
- 7 Pe mar deo gwelloc'h ganeoc'h, grit evel ar bourc'hiz,
Kemerit ur mouchouer e-kreiz ho pemp biz,
Ha dastumit en ho kodell, klenk ha kloz, gant evezh,
Ar pezh na briz serriñ an den diwar ar maez.
- 8 Selaouit, tadoù, mammoù, breudeur ha c'hoarezed,
En anv Doue, Selaouit, mestroù ha mestrezed,
Kentañ tra d'ar vugale a dleit da zeskiñ
Eo gouzout sevel o bragoù ha gouzout c'hwezhañ o fri.

An Eün .

An Tabouliner Kozh.

Ar pezhig-mañ a c'hall bezañ displeget ha c'hoariet war-un-dro gant ur
bugel hag a oar taboulinat. A-raok komz e skoo ur rummad taolioù war e da-
boulin. Goude e komzo hag etre pep poz e skoo adarre war e daboulin.

I

Gwechall, pa oan bihanik, me am eus soñj, hag am bo,
E teue bep bloaz d'hor pardon un tabouliner diwar-dro,
Gant un daboulin vras,
Un daboulin ha div vazh (un taol taboulin)

Hag e dog war gostez e benn,
Ledan, hep lavarout gaou, evel ur grampouezhenn....
A ! tud vat,
Hennezh ' oa un tabouliner hag a ouie taboulinat!

II

Bep mare, en oferenn, ar patr, en un taol krenn,
'Skoe war e daboulin; honnezh, sur, a oa tenn he c'hroc'hen,
Un taol c'hwek, un taol sec'h; (un taol taboulin)
Ar vugaligoù war vrec'h
A rae ul lamm ha da c'harmat,
Pep hini herrdañ m' halle, ha mammoù da lusKellat....
A! tud vat,
Hennezh ' oa un tabouliner hag a ouie taboulinat!

III

Kaer ' dije ar chanterien kanañ kaer ken a raent,
Holl war un dro, pe bep eil, kolist, sakrist, gwashañ m'hallent,
Hag ar sarpant c'hoari,
Peadra da vouzarifñ,
Hast 'm bije ' serrjent o genouioù,
D'an tabouliner gant e ziv vazh dont en-dro....(un taol taboulin)
A! tud vat,
Hennezh ' oa un tabouliner hag a ouie taboulinat!

IV

Daoust d'an traoù da vezañ kaer en iliz, ken e sklerie
Bleuñ, gouleier ha me' oar ! Daoust da gement mad a veza,
Me ne welen netra
'Met an tabouliner en e sav,
E korn ar c'heur gant e ziv vazh,
Hag e c'heden pegoulz e skoje ganto c'hoazh ... (un taol taboulin)
A! tud vat,
Hennezh ' oa un taboulin hag a ouie taboulinat.


V

Son a rae u wech diwezhañ d'echuiñ an oferenn;
Ma vije chomet eno, ne vijen ket aet d'am merenn !
Neuze e tiblase;
Ma daoulagad hen heuilhe,
Hag ec'h ae, sonn e benn, reut e c'har,
Da gas an Aotrou Pardoner d'ar presbitoar.....(ur reuziad taboulinat)
A! tud vat,
Hennezh ' oa un tabouliner hag a ouie taboulinat !

VI

Er pardonioù ' vez bremañ ne vank ket tud akuit
Da skeiñ war ar c'hroc'hen gavr, ha da c'hwezhañ er fleüt;
A-boan o selaouan,
Rak e nep lec'h ne gavan
E bar, na hini da dostaat
D'am zaboliner kozh ' rae d'am c'halon lammataat... (ur reuziad tab.)
A! tud vat,
Hennezh ' oa un tabouliner hag a ouie taboulinat !

B.S.I.



Dre ma' zomp bet skoliataet en hor yezh, ez eo bet digoret hor
speredoù. Rabindranath Tagore.

Son ar Gevier.

I

Me n'em eus biskoazh lavaret gaou,
Met bremaik me lavaro daou.
Me' oa bet en deiz all en Goudelin
Hag e welis an naer o tennañ lin.

II

Hag al logodenn hag ar razh
O tougen lin war ar c'hraevaz;
Ha c'hoazh e lavare al logodenn d'ar raz
Lakaat warnañ hag e tougje; c'hoazh.

III

Neuze e welis ar c'hefeleg
Gantañ ur c'horn-butun en e veg,
Hag ur gontell gantañ'n e zorn
O trailhañ butun da lakaat 'n e gorn.

IV

Neuze ' welis al louarn,
Gantañ 'n e benn ur brid houarn,
O tremen 'mesk ur bagad polizi,
Ha ne redas war-lerc'h hini.

V

Neuze ' welis ar bleiz,
Gwisket en voulouz hag en seiz
O lammat dreist da gloued al laneg
'N e c'henou ur marc'h hag ur gazeg.

VI

Neuze ' welis allogodenn zall
O tougen ar bed-mañ hag ar bed all,
Ha c'hoazh e lavare al logodenn gaezh
N'he doa ket trawalc'h eus e bec'h .

VII

Neuze ' welis al laouenan,
A lar d'an dud n'eo ket bihan,
O skrapat gant e ivinoù,
Oc'h aesa teurel Treger en Gouelou.

VIII

Neuze ' welis war tour Runan,
Ar voualc'h o tivizout gant ar vran,
Ha lost ar big war un drezenn,
Setu echu va c'hanaouenn.

Dizantv.

Penaos e vezo kont er bloavezh o tont.

Didostait, bihan ha bras, didostait da glevout
A-hed ar bloavezh a zigor penaos e vo ar bed.

Daoust n'on ket dre vicher lenner planedennoù,
Na lavarín gaou ebet, ha netra ne gousto.

Garmadeg a vo klevet gant ar vugaligoù,
Pa vo gwalc'het o beg dezho, pe gribet o fennoù.

Yann Grennard a vo troet gant an holl c'hoarioù,
Muioc'h eget gant ar skol nag e gatekizoù.

Krapat a ray e beg ar gwez da zigludañ an neizioù,
Siwazh d'e damm dilhad, siwazh d'e voutonoù !
ou

Dik e vo da vont da laerezh per hag avaloù ,
Met e groc'hen a santo, meur a wech, an taolioù.

Ar yaouankiz 'redo war-lerc'h ar jolori
Daout d'an noz, d'ar gwall-amzer, d'ar poulloù ha d' ar pri, .

Pa'z ay ar chas da vale, al lodod a gano,
Pa'z ay ar mestr diouzh ar gêr, al labour a vano.

Katell gant he beg-a-raok, he nesañ a flemmo,
Met gant meur a daol beg-teod hi a vo flemmet d'he zro.

Er foarioù ne vo gwerzhet nemet loened disi,
Met daoulagad ar prener a welo daou pe dri.

Alan Frilemm a-wechoù a vo paket pinous
Hag ouzhpenn ur c'hañfard fin a vo divleupet . . . lous.

An dour a ruilho war-draoñ , ar moked a yelo d'an nec'h,
Da dapout eürusted, pep hini a ray bec'h.

Evel un diloster-chas, paotr Kernev a douc,
Ar Gwenedour, malac'hti, sul ha gouel a zañso.

Paotr Leon, ar marc'hadour, dizamant a yenno ,
Ha Tregeriz, gant o zraoù pe hepze, a fougeo.

A-walc'h a draoù am eus lavaret, marteze un tamm re,
Ha koulskoude evidomp holl setu c'hoazh ur wirionez:

Ar gwazhioù bras ha bihan en em daol e-barzh ar mor,
Ha puñs an Eternite, dirazomp ' zo digor !

An Eün.

Prosez bras etre Ki ha Kazh.

Diouzh lein ur pres, un deiz, ma c'hazh,
D'am c'hi un tamm prosez a reas:

ar c'hazh: Tec'h , pe gant gwad ruz me a skrivo
Va anv war da vuzelloù !

ar c'hi : Marmouz! Ken bihan . . . ez out
Ma lonkfen ac'hanout kig ha tout!

I E-barzh an' ifern piv a gavfe
Un diaoul ken hagn-hagn ha te ?

2 Ne blij ket din da vourennoù
Da selloù treuz na da ardoù !

I Setu aze pegen koant ez eo 'h,
Ur genou bras, diskouarn pemoc'h !

2 Ez out aze evel un naer,
O'n em ruzañ d'ober da laer!

I Eveldout, kloukez, ! ez eo ret, moarvat
Flapañ an treid e-kreiz ar plad !

2 Chaokat bara ne brizo ket,
Na patatez mar ne vent ket fritet !

- I Na te boued moc'h na lonkfes ket,
Mar az pefe krampouezh viaouet!
- 2 Da vlej klemmus pa vez o sabatiñ
E-pad an noz a laka ar spont en ti!
- I Ha te, kozh sod, a harzh d'al loar vras,
D'ar c'hloc'h o seniñ, d'az skeud er wazh!
- I E-pad an noz, re rez nemet ronal
Evel ur gozh drask o hunvreal!
- I Ne glever, nemédout, genaoueg,
Evel ur forn, digor da veg !
- 2 Da lost en-dro dit ereet,
Evel ur bern-kaoc'h ez out . . . chouchet!
- I Te ' zo ul . . . louz, ha c'hwezh ar brein
A zo gant da c'henou ha da gein!
- 2 Te a ra, poezon, n' . . . ec'h eus ket a vezh,
E-kreiz ar bern-ed e-lec'h mont er-maez !
- I E-lec'h spontañ : . . . saoud, kezeg ha yer,
Da blas a vefe er gêr !
- 2 Te a chom ken plaen war da dorchenn
Ken na grog an tan ez kroc'hen !
- I Mont-dont a rez . . . , beulke, dre an hentoù,
Ken na ziver babouz eus da c'henou !
- 2 N'eus ken a gerc'h d'ober yod,
Debret eo bet gant al logod !
- I Mar n'eus ken ed, te, va lampon !
E lez da vont gant ar gedon !
- 2 Dek gwech bemdeiz, gant ar merc'hed,
Filouter fall, e vez argaset !
- I N'out ken ket fur, aes eo gouzout,
Staget en ul c'loch evel ma' z out !
- 2 Krougañ seurt kizhier, a dlefed,
Hag o deus aon dirak ar razhed !
- I Droukkomz, hardiz, me a lavar dit krenn,
Ne vi biken nemet un torrpenn !
- 2 Teod fall, me a lavar dit, berr -ha-barr,
Nen out nemet ur c'haoc'her !
- I Me az tapo, sod-nay!
- 2 Me az kavo, kanailh !
- I D'hô toull, mezh ar chas !
- 2 D'ho neiz ! diaoul a gazh !

Ar prosez-mañ a zalc'ho c'hoazh,
Marteze fenozh, ha sur arc'hoazh,
N'eo ket ar ch c'hiz, er memez ti,
Gwelout ar peoc'h etre kazh ha ki .

Prestit-hi din ,va mignoned,
Ho silañs,ho pasiañted,
'Vit ma larin deoc'h un disput
Savet etre an daou loen met mut.
Savet eo bet ar fachiri
Etre ar c'hazh hag ar c'hi,
Evit gouzout en ur ger berr
Pehini eo ar muiañ nesaser.

ar c'hi: Ar c'hi a lavar da gentañ,
Me 'c'h eo an nesaserañ;
Me ' ziwall an ti,ar madoù,
Gant aon 've laeron 'barzh ar vro.

Ar C'hazh:Neuze e lavaras ar c'hazh:
Me ' zo nesaseroc'h c'hoazh;
Panevedon e ve drailhet
Madoù an ti gant al l.ogod.

ar c'hi Pa vez an ed 'barzh ar c'harrdi,
Un dra ret-holl eo kaout ur c'hi
Evit ober ar faksion
Gant aon n'errufe laeron.

ar c'hazh Te ' vez 'pad ur miz pe zaou
Oc'h eveshaat an ed 'barzh al leuriaoù;
Ha me a vez e-pad ar bloaz
O harz al logod d'o drailhañ.

Ar c'hi Pa vez ezhomm da veajiñ
Neuze e vez galvet ar c'hi;
D'eveshaat ar saoud hag an deñved
N'eo ket kizhier a vez klasket.

ar c'hazh Ya,dre ma'z out un didalvez !
Netra ne blij dit nemet bale,
Ha me a vez dalc'hmat er gêr
Prest d'ober ervat va dever.

Arc'hi. Peseurt dever 'vel-se a rez
Pa ne rez mann nemet laerezh ?
Te ' zo kaoz da vil bec'hedoù
'Balamour d'az laeroñsiou.
Pa vez troet chouk ar vatezh
'Mañ fri ar c'hazh 'barzh al laezh.
Tachat !Tachat ! eme Janed,
Met gant an diaoul, e vez s' posedet .

Ar c'hazh Kreñvoc'h 'out 'vidon en galloud,
Met me ' zo finoc'h evidout;
Te a gousk e penn ar bern plouz,
Ha me a gousk en ur gwele dous.

Bet int o-daou en tribunal,
'C'h ober un akord jeneral;;
Lavaret ' oa dezho gant ar barner
Ober pep hini e zever
Rak o-daou int nesaser !

Prezegenn-gañv Fañch Kefeleg.

(Da vezañ displeget gant unan pe veur a hini).

- I Paour kaezh tonton Fañch ! Piv en dije laret
Eizh deiz 'zo, e vije amañ hiziv gourvezet !
O ! va zud ! na pegen treitour eo ar marv !
A-greiz-holl ' teu d'hon diskar gant e falc'h c'harv !
- II Tri bloaz ha tri-ugent, daou viz ha pemp devezh ,
Se n'eo ket gwell gozh evit un den dizimez,
En deus bepred bevet dinec'h ha dibreder ,
Hep kaout eus un tiegezh ar garg ken ponner .
- III Mar karje ar paotr kozh bezañ bet un tamm furoc'h
Marteze e vije bet e vuhez hiroc'h;
Kalz re a vutun-fri a lakae en e fri;
Soñjit 'ta, bep sizhun, kazi leizh ur pod-pri !
- IV Re a vutun -karot a implije ivez,
Netra gwelloc'h, me a gred, evit berraat ar vuhez,
Ur vrunennig bep eur a lakae en e c'henoù,
Peadra, va zud kaezh, da doullañ e jodoù .
- V Hag ur gwall lonker sistr e oa ivez ouzhpenn,
Hep kontañ ar mikamo, ar bannac'hoù gwin gwenn.
Muioc'h en deus taolet e ti an ostizien
Evit n'hor bo, a dra-sur, ni e heritourien.
- VI Mar karje, a-raok mervel, bezañ da vihanañ,
Rannet etre e dud e dammig peadra,
N'hor bije ket da baeañ kement a druajoù,
Ar pezh a raimp bremañ dre vil ha milurioù.
- VII Nag eñ a oa lipous, Doue d'hen pardono !
Evit debriñ krampouezh gwinizh en dije graet dek lev .
Ha betek pemp tamm sukr a lakae en e gafe,
Lavarit mar n'eo ket ur rivin ar seurt tud-se ?
- VIII Un tamm e oa ivez gogez, war a glevan,
E-pad an deiz o klufaniñ gant Soaz pe Chan,
Ne dalv ket ar boan nac'h en doa un teod millaget.....
O ya 'ta ! Na gwellañ eontr hon eus-ni kollet !

Bazvalan.

§§§§§§§§§§§§§§§§§§§§§§§§

? ? ? Levraoueg S K O L ? ? ?

Darn eus al levrioù a brenomp a vefe gwelloc'h etre daouarn hol lennerien eget war lañsed uhelañ hon armel ! Setu perak hon eus soñjet pres-tañ d'hol lennerien al levrioù a vo bet studiet amañ dindan an talbenn: "A-dreuz lenn". Kement-se evit ar mizoù-kas hepken -evit 50 lur paeet war Gont-Red "SKOL", hag e-pad 15 deiz leun. Fiziañs hon eus en onestiz hag en kengarantez hol lennerien. Setu amañ al levrioù a lakaomp e "Levraoueg SKOL" : "L'Emploi des langues vernaculaires dans l'Enseignement", UNESCO. "Bilingualism in Wales", gant R.E. Davies, eus Afrika ar Su. "L'Enseignement des Langues Vivantes", Unesco. "Aspects de l'Education aux U.S.A.", gant André Conquet.

Ha m'hoc'h eus ul levr bennak da zioueriñ kasit anezhañ dimp evit
" Levraoueg S K O L". Bennozh-Doue !

L O D E N N A R G E L A O U E N N .

Kembre ha Breizh e kañv. .

D'an 28 a viz Kerzu ez eo marvet an Aotrou Pastor Dyfnallt J. Owen, Rener ar gelaouenn Y Tyst, hag Arc'hzrouiz Kembre.

Div wech hon eus bet an enor hag ar blijadur da vezañ degemeret en e di ha da gomz gantañ diwar-benn e vignon bras Yann-Vari Perrot, hag ar pezh en doa graet evit skoazellañ ar Vretoned heskinet hag harluet war-lerc'h darvoudoù 1944. An holl zielloù dastumet gantañ a zo bet fiziet e Levraoueg Vroadel Kembre en Aberystwyth.

Kinnig a reomp hor gourc'hemenoù a gengañv d'an Itron J. Owen, ha d'he bugale: an Itron Patterson, ha d'an Dr Geraint Owen, a zo ivez mignoned vat d'hor bro.

Requiescat in Pace !

+++++

KENSTUDI.

diwar-benn " 300 DIVINADELL."

digant Y.C. " "Skol" a blij din evel just: Kalon ha spered he deus !".

digant A.O. "Va gourc'hemenoù evit ho tastumad divinadelloù. Mat-tre evit lakaat ar vugale da lenn o yezh".

digant E.T. "Munutenn an divinadell a zo stalet bremañ em c'hlas. Bourrus kenañ eo evit ar skolidi hag ar brezhoneg en em sil... en ur c'hoarziñ!"

digant J.R. "Setu amañ un toullad divinadelloù hag a zo bet dastumet gant skolidi eil klas Skol Sant-Pêr... Ar Rener a zo laouen ivez eus ho tastumadenn. Ober a ra ganti. Ha me bep sadorn, eus 4e da 5e a ra skol vrezhonek ganti".

digant H.J. " Ho pet ar vadelezh da gas ur skouerenn eus "300 DIVINADELL" da ' Mlle le Directrice, Ecole Libre des filles, à Kersaint, par Guipavas!".

Grit evelto ! Grit evelto ! Grit evelto ! Grit evelto !

diwar-benn ar "gerioù etrevroadel" digant Youenn An Olier.

"Ankounac'haet em eus lavarout deoc'h ' n'on ket a-du tamm ebet gant ar gerioù etrevroadel a implijit pa zistroadont gerioù brezhonek implijet dija er yezh. (Analiziñ, da skouer, n'eo ket mat peogwir ez eus ur ger a all er yezh endev ha n'eo ket aesoc'h da gompren evit tud ar bobl eget dieñfenniñ, war-bouez nebeut, rak re bell eo ar furn skrivet brezhonek diouzh ar furn skrivet gallek. Ret eo diforc'hañ ar yezh skiantel rik, tec'hnek hag a zo e gwirionez ur 'jargon' diouzh ar yezh evit an dud a-zoare, an 'honnêtes gens' e-giz ma lavare ar c'hallaoued gwechall. Gouzout a rit mat e teuer a-benn da implijout en Izevroeg pe en Alamaneg, el levrioù medisinerzh, troioù-lavar latin penn-da-benn gant tro-c'henel h.a. Ar yezh - se ne c'hell ket bezañ ur skouer evit yezh bemdez -dielfenniñ, goude holl, a zo ur ger pemdeziek, n'eo ket ur ger skiantel. Ar C'hembraeg n'eo ket ur skouer evidomp e pep keñver. Hon hengoun yezhel-ni a zo renet gant F. Vallée ha M. Mordiern ha ret eo deomp derc'hel d'an hengoun-se da gentañ. A-hend- all ne zeuio... nemet dizurzh er geriadur - ma ra pep hini diouzh e froudenn - evel... er reizhskrivadur. Ret eo diforc'hañ mat eta ar 'ja gouilh&j' skiantel - e... pelec'h emañ ar bevennoù anezhañ ? -diouzh ar yezh voutin, pezh na rit ket a-walc'h d'am soñj. Ne gav ket din e talv ar boan implijout gwech ar ger brezhonek, gwech ar ger etrevroadel (nemet evit deskiñ ar ger

brezhonek da dud ar bobl ,lakaomp) rak an idra-se ne ra nemet strobañ ar yezh hep pinvidikaat anezhi e gwirionez ".

+++++
PAJENN AN TIEGEZHIOU BREZNONEK.
+++++

DIGANT Y. An Olier. " Ho kelaouenn, d'am soñj, ne zlefe ket ober war-dro ar skol hepken, hogen war-dro an tiegezhioù dre vras. Soñjet em eus a-wechoù sevel ur seurt kelaouenn hogen n'em eus ket amzer hag ouzh hep ouzhpenn-se e c'hellfe ho kelaouenn ober an afer mat-tre (ret e vefe avat gouestlañ niverennoù pe bajennoù d'an tiegezh e-unan: ar skol a zlefe harpañ an tiegezh da gentañ). Daoust ha soñjal a rit en dra-se ? Laouen e vefen ouzh hoc'h harpañ war an dachenn-se.

Pezh a c'hellfec'h ober ivez eo liesskrivañ (ken mat ha ken splann ha ma' z eus tu) troidigezhioù levrioù skeudennaouet evit ar vugale. Graet em eus troidigezhioù diwar meur a levr e-giz-se: 'Ar Gwaz e blu Aour' (Grimm) ; 'An Daouzek Priñsez o vont da zañsal' (Grimm); 'Rozenn -Wenn ha Rozenn-Ruz' (Grimm); 'Plac'hig Vihan ar Mor' (h.a.6 pe 7 levr evel-se) ar rummadoù-mañ a zo ar re wellañ: 'Les Petits Livres d'Or'; 'Les Petits Livres d'Argent'; 'Les Albums Merveilleux'; 'Les Contes du Gai Pierrot'. Al Levrioù-se a zo levrioù skeudennaouet dreist-holl, berr a-walc'h hag aes da dreiñ eo ar skrid, aes eo pegañ warno an troidigezhioù. (Dav e vefe kaout ur paper gwenn tev a-walc'h; didreuzwelus.' Evit ober mat e vefe ret lakaat al levr dindan ar wask bude bezañ aozet anezhañ. Mat e vefe liesskrivañ e ruz: al liv-se a glot mat gant liv splann ar skeudennadurioù. Hanter kant skouerenn a vefe a-walc'h. Dav e vefe ijinañ un doare koumanant: dont a rafe un droidigezh er-maez bep pemzektez. Evel ma ne goust nemet kant lur pep levr ne zeufe ket da re ger. Ar pezh a vefe ret eo divizout en a-raok peseurt levrioù a vije da dreiñ. Kontadennoù -pobl pe istorioù o tennañ d'ar vuhez bemdez a vefe ar gwellañ.

A-benn bloaz e c'hellfed liesskrivañ un droidigezh evit levrioù bras e-giz "Kelc'hgeriadur evit paotred ha merc'hed" (Rumm: Les Grands Livres d'Or) 100 p, 136 pennad; I 500 skeudennadur e liv; 350, e du. 'Douaroniezh Hollvedel' (Hevelep rumm, 100 p. 40 kartenn, 300 skeudennadur e liv a zo ennañ. "

Respont: Ne c'houlan ket gwelloc'h eget kenlabourat war an dachenn-se, met ret e vefe da gentañ en em glevout gant Renerien "Al Liamm" hag o deus pleustret war n dachenn-se dija gant kalz a verz.

Ur wech dibabet al levrioù, troet ar skridoù, ez on prest da lakaat moulañ an testennoù diwar goust "skol". Met gwelloc'h e vefe c'hoazh marteze klask en em glevout gant embannerien ar skridoù gallek.

+++++

EVIT AR SKOLIOU HAG AN TIEGEZHIOU.

"Rimadelloù ha Kanaouennoù evit ar vugale", ur bladenn hirbadus (33 tr) embannet gant "Komz ha Kan", I 500 lur, e ti an Itron Galbrun, 78, rue de Fontenay, Vincennes, Seine.

An holl destennoù embannet amañ a zo gouest da blijout d'ar vugale, dibabet ma' z int bet gant Kerlann, ha kanet pe zispleget gantañ hag e diegezh. Dasout ma' z eo ur menoz mat-tre sevel seurt traoù, ha dre ma' z eo ur menoz mat-tre e rin d'ar bladenn-mañ daou rebechig.

Da gentañ, hir eo ar bladenn. Re a bezhioù heñvel a zo war an hevelep tu ha diaes eo o dispartiañ: war un tu kanaouennoù hepken, ha war an tu all rimadelloù, disheñvel a-walc'h, hag ur gontadenn. Me a blijfe din, ha muioc'h c'hoazh d'ar vugale, pladennoù bihanoc'h - 45 tr. da skouer. Marn'hamatoc'h e vefent ha muioc'h e vefe tu d'embann anezho. Ret e vefe la-

kaat war an hevelep pladenn ,pe war an hevelep tu,danvez liësseurtoc'h, da skouer ur ganaouenn ,un unangomz,ur rimadell pe ziv .

Ret eo ivez anzav n'eo ket fraez a-walc'h an dis-tagadur hag ez eo diaes a-wechoù kompren ervet ar c'homzoù,pezh a zo dipitus pa fell deoc'h implij ar bladenn en ur skol.Ne gav ket din ez eo ar gomzerien a vefe da damall met kentoc'h ar binvioù pe an doareoù d'enskrivañ.

Dav e vije bet ivez reiñ da heul ar bladenn roll ar pezhioù ha zoken testennoù ar rimadelloù. Embann a reomp amañ roll an testennoù,savet ganeomp diwar selaou hepken:

war un tu : Disul me ' vo pinvidik, kanaouenn.
Deus amañ ' ta Cahntig'.
Me ' m eus ul labousig gwenn.
Marijanig,Lagad Bran.
Son ar C'hazh.
Yannig, an Difouper neizioù.
Kaourantinig ha Marivonig.
An Durzhunell.
Plac'h vihan an Aotrou.
Julig ar Ververoù.
Bannieloù Lampaol.

War an tu
all : Ma breur Jakez kanaouenn.
Deut eo ar mestr d'ar gêr. Rimadell.
Me' m boa gwelet en Sant-Paol
Rimadelloù da c'hoari -marc'h:Marc'h Hamon,
Hei do,marc'hig,
Marijanig .

Son tonton Ivon.
Bizig Mareo,
C'hoari ar C'had.
Al logodennig vihan.
Kanaouenn an dud o vont d'an oferenn.
Biskoazh Kemand-all.
Me ' m eus un tiig war ar maez.
Ur Roue ...
O tennañ panez.
Ar Podig-Yod. kontadenn.
Ur rimadell gant goulennoù ha respontoù.
C'hoari ar bleiz an hag an deved.
Ul le da startaat un emglev.

"Tour ar Bleiz". ,gant Paol Feval,16 pajenn embannet gant Al Liamm,150 l. Ur gontadenn c'hallek adapzet en ur brezhoneg brav-tre gant Pêr Denez. E wellañ -- troidigezh,moarvat.Plijus e tle bezañ d'ar grennarded daoust ma ' z eo luziet a-walc'h an darvoudoù a-wechoù.

) oooooooooooooooooooooooooooooo (
LEVRIOU DEGEMERET.

"François Vallée,Sa Vie,Son Oeuvre," aozet gant E.Le Barzig,embannet gant "Cercle de Broc liande". 30 p.in 8^e Raisin,200 lur.Ur brezegenn graet e Gorsedd Sant-Brieg,e miz eost 1956,hag a chello lakaat ar - c'hallegerien da anavezout labourioù F.Vallée.Dav e vije bet pouezañ war e strivoù d'unvaniñ an doare-skrivañ.

"La Roche-Derrien et ses Environs," skrivet hag embannet gant E: Le Barzic, rener ar skol gristen, Quédillac, I & V. (500 Lur) Mar n'eo ket dedennet an holl gant istor ar gêr vihan-se - daoust pegen plijus e vefe - an holl a lenno gant frouezh ar pennadoù gouestlet da trefouedaj Roc'h ha d'ar skrivagner brudet Narcisse Quellien.

"Christmas Hymns", edited by Roparz Hemon. Noueloù . Gwenedek eus lodenn gentañ ar XVII^e et kanved, d'an nebeutañ, studiet e-kerver yezhoniezh gant R. Hemon. Met an testennoù-se n'int ket talvoudus hepken e-keñver istor ar yezh, met c'hoazh e-keñver istor ar relijion gristen en Breizh, ha zoken e-keñver istor ho lennegezh: kalz disteroc'h egeto a gaver da skouer e "Maria", Encyclopédie Mariale, aozet gant an Tad Du Manoir, hag embannet e 3 pe 4 levrenn dev e ti Beauchênes.

mmmmmmmmmmmmmmmm
mmmmmmmmmmmmmm
mmmmmmmmmmmm
mmmmmmmmmm
mmmmmmmmmm
mmmmmmmmmm
mmmmmmmmmm
mmmmmmmmmm
mmmmmmmmmm
mmmmmmmmmm

TAOLENN.

TAOLENN.

RIMADELLOU HAG UNANGOMZOU.

V. Unangomzou.

Raklavar	p. 1
I. C'hoarioù:-	
Evit dispartiañ	2
C'hoari ar c'hreunenn-aval	3
C'hoari ar bizied	4
Evit touiñ	4
C'hoari buoc'hig-Doue	5
C'hoari Bizibul	5
C'hoari an daou dorn Bullo	5
C'hoari an divhar	5
E-barzh an ti	5
War an daoulin	5
C'hoari ar skouarn	7
Pater Noster dibidoup	8
II. Mouezioù ha Trouzioù. 9	
III. Rimadelloù berr II	
IV. Rimadelloù hir:	
Kilhog Yann an Du	14
Kouignaoua	14
An Higenane	14
Evit deiz kentañ ar bloaz	15
Kenavo Meurlarjez	15
Son ar C'hazh	15
Yann hag e Aotrou	16
An daou Yann	16
Yann hag e Vamm	17
Rimadell hep fin	17
Ha gouzout a rez galleg?	17
Da biv out mab?	18
Perak eo du da c'henou?	18
Gousperoù Kernev	18
Ar C'hilhog hag ar Bolez	19
Ar Park Kaer	20

Marv ar C'hi Moustach.	21
Un huñvre Fentus	21
Kanaouenn ar Frioù Lous	22
An Tabouliner Kozh	22
Son ar Gevier	24
Penaos e vezo kont er bloav.	24
Prosez bras etre Ki ha Kazh	25
Breujoù etre ur c'hazh hag ur c'hi	27

LODENN AR GELAOUENN.

Ali a-bouez	p. 1
Reizhadennoù en "300 Divinadell"	3
Levraoueg "Skol".	28
Kembre ha Breizh e Kafiv	29
Kenstudi	29
Pajenn an tiegezhioù....	30
Evit ar skolioù.....	30
Levrioù degemeret.	31

++++++ +++++++
++++
+

HAR-IT "SKOL"

HARPIT AR BREZHONEG

- Kasit deomp ur prof.
- Prenit an niverennoù kozh ... evidoc'h
- evit ho mignoned
- evit ar vistri-skol a anavezit.....

BRUDIT "SKOL", BRUDIT MENOZIOU "SKOL", Kelaouenn an amzer-da-zont. !

BRUDIT "SKOL", BRUDIT MENOZIOU "SKOL", Kelaouenn an amzer-da-zont !

" S K O L "

Dastumadenn a Selennouriezh

(C'Hevrer 1957)

:::::

Rener : A. ar C'Halvez, Rener Skol Sant Erwan
e Ploueg-ar-Mor

Priz an niverenn : 200 lur
Komanant evit div niverenn : 400 lur
Ar profoù a vezo degemeret gant anaoudegezh vat.

xxxxxxx

Kas al lizhiri, ar skridoù hag an arc'hant da
M. l'Abbé Armand LE CALVEZ
Directeur Skol Sant Erwan
Plouezec (C.d.N)

xxxxxxx

8 shilling e Breizh-Veur hag Iwerzhon

Kas an arc'hant da :

Mr. David DAVIES ,
13c, Alfred Street,
Maesteg.
Glams. Wales

Moulet ha liesskrivet e Ti Herve ar Mee
14, straed Naonedek, 14
ROAZHON